

Niveroù negativel ... pe fazioù ?



D'Alembert

Implijet gant an holl vatematikourien abaoe fin ar XVI^{vet} kantved abalamour ma oant binvioù efedus evit jediñ, an niveroù relativel o deus laket diaes meur a hini anezhe betek an XIX^{vet} kantved !

Ar matematikour gall Jean Le Rond d'Alembert (1717-1783) a soñje dezhañ ne oa ket pozet mat ur problem ma veze kavet diskoulmoù negativel.

Da skwer e lavar ur c'hamarad d'egile : "Mankout a rez arc'hant din met ma roez 100€ din, neuze e vankin 50€ dit."

Diskoulmomp neuze ar gevataleñ :

$$x + 100 = 50$$

– 50 eo an diskoulm.

Hervez d'Alembert e rankfe ar gevataleñ bezañ $x + 50 = 100$, ma vefe pozet mat ar problem :

Le signe, [emezañ] que l'on retrouve avant une quantité sert à redresser et à corriger une erreur que l'on a faite dans l'hypothèse, comme l'exemple ci-dessus le fait voir très clairement.

(Ar respont – 50 a sinifi e vank an eil 50€ dan hini kentañ.)

Cette quantité – 50 ne se trouve précédée du signe –, que parce qu'il y a quelque erreur tacite dans l'hypothèse du problème ou de l'opération...